



35

CANTIG SPIRITUEL

Var sujet Apparition ar VERC'HEs en Escopty a Artois, an devez quenta a vis Even er bloaz 1768.

Var ton Guers Sant Ugen.

MEULET ra vo an Dreindet, Tad, Mab ha Speret-Santel,
Ha c'hui ive Guerc'hes fidel, pa hoc'h eus en em apparisset

C'hoas etouez ar Gristenien, evit gallout o souten.

Abaone ma hoc'h eus ganet ho Mab en ur c'hraou dister

Biscoas dên e nep carter n'en devoe an enor d'ho quelet,
Nemet er bloavez-màn eürus oc'h en em disquezet
Mam Jesus.

Didostaït amâ, christenien, c'hui tud devot da Vari,
Da renta ho meuleudi d'ar Rouanes Souveren,
En Escopty a Artois e deveus laquet cals a joa.

Er vilagen eus a Moutier un den honest bras meurbet,

Pinvidic bras en effet, pehini a gare Doue,
E joa voa soulagi ar beaurien en o annui.

Sulvuy ma roe an alusen, sulvuy e cresque e zanvez;
Benediction Doue so varnezo a dra certain,
Pa soulage ar memprou eus a Jesus hon Autrou.

An den-mâ en devoa pedet querent hac ameseyen,
An deis quenta a vis Even, da zont da ober ar banquet
Eus ur c'hontrat en devoa da zimesi ur mab deân.

Pa edo ar c'hompagnunez tout ouz an daol o coania,
E teuas da c'houlén logea hor mam biniguét ar Verc'hes,

Hep beza anavezet, rac paour bras oa guisquet.

Etre e divrec'h e tougue oll joüüstet an Ælet,
Silvidiguez ar bed-oll, Jesus-Christ guir vab da Zoue,
Gant ur visaich caër ha charmant, ha paour bras e
viscamant.

En instant ma e deus goulennet digant ar Mæstr
eus an ty,

Ma loget, me ho suppli, evit un nos, mar permetet,
Elec'h ma vo ho polonte, paet e viot gant Doue.

An den-mâ leun a garante en andret ar beaurien
guæs,

En deus lavaret d'ar Verç'hes ya, hep ma e anaye,
Ya, emezàn, deut en ty, me ho logeo ho mabic ha
c'hui.

Dre an dorn en devoa-y quemeret, ha laquet da
aseza;

E-unan a guemeraz Jesus hor Salver biniguet
Da lacat var e varlen; hemàn an enor, Christenien.

Seul mâ sell ous ar c'hrouadur, seul caëroc'h er
c'have,

Ravisset eo e ene, e galon so en e blijadur,

O velet ur mabic, quer charmant, quer caër, quer
ravissant.

E-unan en deveus-y pedet : debret ivez, emezàn,
Mæs hi en trugareca, ne devoa na naon na sec'het
Mæs calz a pligeadurez o velet ar c'hompagnunez.

Pa voa ar repæs achuet, e c'houlennas diganti :
Leveret, me ho supli, a belec'h oc'h, mar permetet,
Ha pezh hano oc'h hanvet, ive da belec'h e zit.

A noblanç bras oun, emezi, guinidic a Galilce,
Evit lavaret ar virione, a dra sur oun hanvet Mari,
Hac ez on deut gant ma mab da zigaç ur c'helou mad.

Ur mignon am eus, emezi, a dle caout un heritach,
Ha c'hoas ive davantach, ar propriete en e dy,
Pa zeo bet trugarezus en andret mempron Jesus.

Ar re se o deus pedet ha gounezet evinta
An heritach ar c'haëra, pehini a dle da gaouet

Quent ma achuo an eis de, songet mad e quemense.

An den-mâ hep beza songet ebars er recit-se
Quer profitabl d'e ene, outy en devez goulennet,
Ha bras e voa ar baourente dre ar vro ma tremene.

Pegument bennâc, emezi, ez eo fachel hon Doue
Ous ar pec'het, nos ha de ne ra nemet e offanci,
Eo prest c'hoas da rei pardon, mar goulonnont a galon.

E pouvoar hac e vadelez so en tu-all d'hor maliç;
Mar meritomp ar supliç, ama c'hoaz leun a vadelez,
Ne vang quet da fournissa peadra evit beva.

Ar gurunen deus gourdrouset ha revinet o tier,
Ar grisil hac an avel en deus iffamet ar c'harter,
Ar glao hac an dour quer bras ne voe gulet ennàn
biscoas.

Un nombr bras a vatimanhou a so collet dre ar mor,
Hep gallout en em sicour, ar maro subit a veler
O caç hoc'h amezeyen d'an douar a dra certen.

En ur guer, bresel ha quernez a veler dre ar c'harter,
Hac ive quement maleur pere o arru gant ar pec'her,
So avertissamanhou a arru abers hon Autrou.

Mæs ma mignon, me ho supli, dalc'het sonch eus
ma c'homsou

Ne dint quet faribolennou pere a alfe da ziferi,
Gant Doue int lavaret da ziscleria var ar bet.

Teir bloavez ho po assuret an abondanç eus a hep
traou

Quement a rancor da veva, an oll a vo rejouisset;
Guinis, Segal, ha pep had tout, a vezo marc'hat mad.

Quement a vezo o comerci a vezo tout rejouisset,
O velet ane calonec, hep tristidigucz nac annui;
Ebars e Rouantelez Franç e vezo rejouissanç.

Un abondanç a faveryou a zisquenno eus an Eê;
En em rejouissomp, bugale, Doue a roi deomp e
graçou

Goulennet ountàn pardon, pedet-èn a galon.

Na guemeret quet ma c'homsou da fablennou, mar
queret,

Quer guir emeus lavaret, evel ma zeot da ben tri dez
Davet Doue da repos gloar eus ar Barados.

Hounnes ar succession a dliac'h-hu da gaouet,
Evel m'am eus deoc'h lavaret, da Zoue ez oc'h ur guir
vignon,

O soulagi ar beaurien guæz ez eot davetàn d'e Balæ.

Pa oa achuet o parlant gant modesti ar c'haëra,
E bisach carguet a joa evel an Heaul a zeuas brillant
E guiscamant caër meurbet, an oll a voa soueset.

Ur c'huez an excellanta a lacas ebars en ty;
Meulet ra viot, Mari, eürus bras eo tud an ty-màn
O velet ar Vajeste eus a Jesus Mab Doue.

En instant e voa anavezet, Jesus hor Roue guirion
A roas e venediction da guement voa assamblet,
E presañ ar gompaignunez e pign en Eê gant an
Ælez.

An den-màn a voe quen estonet gant queñ d'ar
Verc'hes Vari,
Mantret e galon, na ell mui pa sonch piou en doa
gulet,

Crial a ree epad an nos, Mari, ma c'hasset ganoc'h.

An tronos vintin e varvas an den santel-màn,
E ene gant cals a joa a ya da velet hor Salver,
Entre daouarn ar Verc'hes sacr, pa en devoa dalc'het
e Mab.

E bried hac e vugale gant laouenediguez bras
O deveus batisset var ar plaç ur Chapel da Vam hon
Doue.

Ar Verc'hes a drugare a invoquer er plaç-se.

Un nombr bras eus a Viraclou a ra er plaç santel-
màn,

Quement a ya d'e bisita, oll e recevont e graçou,
Meulomp Jesus Roue an Tron, ha Mari e Vam guirion
Didostaet eta, Christenien, guir dud devot d'ar
Verc'hes,

Deut da recita bemdez ar Chapelet e C'burunen

Gret a bemzec boquet Ros fleurissant er Barados.

Rouanes ha Guerc'heset, ha guir Vam da Zoue beo,
Pedet evidomp betec ar maro, evit ma vezimp pardon-

net,
Ma c'hallimp mont da repos, ha d'ho meuli er barados.



CANTIC TRUESUS,

*Evit rei squer d'an Tadou ha d'ar Mamou da
instrui o Bugale deus ar maleuriou arruet en
ur Vilagen etre an Naonet ha Paimbœuf.*

Voar ton Santes Genovefa.

ME ho supli, Speret-Santel,
Da rei speret a lumier,
Da ziscleria d'ar Vretonet,
Pevar maleur bras arruet.

Er memes devez en un Ty,
Horrol ha spont eo compreni,
An Tad hac ar Vam a so beuzet,
Ha daou Grouadur so lazet.

Disquit-y Tadou ha Mamou,
Ma c'hinstruot ho pugaligou,
Evit dional dre guemense
Na rac'h drouc ebet dirase.

Rac ar Vugale so mechant,
Malin en amser a squiant,
Diminui a ra ar santeles,
Cresqui a ra ar fallagries.

Un ozac'h er goan tremenet,
Hep ma songe e drouc ebet,

En em laquas da sivoada,
Ur Penmoc'h en devoa o larda.

Goude ma en devoa quempenet,
En instant int bet sortiet,
Da ober e servich pep hini,
Ar Vugale a chommas en ty.

Ur Potric en oat a seiz bloas,
Pa voa sortiet e Dud er meas,
En deveus quemeret ar gontel,
Da laza e Vreur a voa er c'havel.

En e c'houzouc èn e flancas,
Hac e zigueri a songeas,
Evel m'en devoa remerquet
Penaus oa ar Penmoc'h digoret.

Pa edo o songeal e zigueri,
E sant e Dad o tont d'an ty,
Hac èn mont buan da lavaret,
Ma zad, va breur am eus lazet.

Gant cals a spont ous e glevet,
E Dad a chomas estonet,
En e galon an huanat,
An daëlou en e zaoulagat.

Semplat a vennas gant melconi,
O velet rus glaou leur an ty,
Gant ar goat en devoa scuillet
E Grouadur a oa lazet.

N'ellas quet en em arreti,
P'er guelas d'en em goleri,
Sioas eguile a lazas,
Dre brontitud gant un taol bas.

Hac èn so den var an douar,
A alze compren e c'hlac'har!
O velet e zaou innoçant

Lazet, troubla a re e santimant.

Ne ouin quet penaus e c'hallas flach,
Na ran e galon var ar plaç,
Ne ouie petra da ober.

Sioas mont a ra e disesper.

Eleac'h souffr gant patientet,
Evel pa vige trelachet,
E quemeras ur faltasi
Hac ez eas er mor da veuzi.

Pa edo o vont e cavas e Vroec,
Hac e deus outàn goulennet,
Pelec'h e zit-hu, va Friet,
Meurbet ho quelàn contristet?

Mont, a ràn, emezàn, en ur bale,
Allas tristaat a reot ive,
Var ar guer-se e tispantias,
Sioas er Mor en em dolas.

Ar Vroec paour-mâ en Ty pa antreas,
Teir pe bedir gueich e semplas,
O velet he daou Grouadur
Lazet, pebes displigeadur.

Piou eo an hini a alfe exprima,
Glac'har hac anquen ar Vroec-mâ,
O velet leur an Ty rusiet
Gant ar goat eus he innocantet.

Ne ouin quet penaus er plaç ne varvas,
Cousgoude e devoa ar gourach,
Da vont da clasq he Friet,
O songeal clevet ar sujet.

Penaus oa ar maleur arruet,
Ma oa he daou Grouadur laset,
Er Mor er guelas o veufi,
Ma zeas da glasq e savetei.

Lamet a reas hep complimentant,
Ebarz ar Mor en un instant,
Evit gallout sicour he Friet,
Allas o daou e voant beuzet.

Pevar maleur truezus bras,
Mar boe jamæs clevet biscoas,
Guelet en ur pennat dervez
Distruget Tud un tieguez.

An ty a gren so abandonet,
Allas an Dut so perisset!
An Tad hac ar Vam so beuzet,
Hac ar Vugale so lazet.

Tad ha Mam ha c'hui Bugale,
Profitit eus a guement-se,
Evit divoal eus ar maleuriou,
A ra cals a Vugaligou.

Gant an tân pe e meur a façon,
Pa vent leset en abandon,
Lies a veich ec'h erru goall
Pa na chom o zut d'o divoall.

Profitomp a pevar maleur,
Ma raï deomp tec'het diouz danger,
Ha pedomp evito hor Salver,
D'o receo er gloar eternal.

FIN.